

iannik kokard a bloumillau
 brawoa pod iaouank zo er vro
 ma nam c'homer me er lovro

— ma zad va mam ma noc'h kontant
 me kemero eur plac'h iaouank

me kemero mari tilly
 eur madou bras a roër gati

rei a rer gati eur gomanan(t)
 a lei'z eur boëzel a arc'hant.

a lei'z eur veol deuz a neud gouen,
 eur c'har ouarnet ag eun ten.

Mari tilly no pezo ket
 rag dem ni a ve reprochet
 a ve eur gagouez o pe bet

va mam va zad da vianan
 va list da vond da pardonnan
 Dar folgoat pe da santez Annan

Pa voa e vond e montroulez
 e rankontras e gagouez.

— iannik kokard va bolonte
 Da pelec'h e hid tu er guis ze ?

e vond da bardonnan da folgoat
 Doue a reï din eur pardon mad.
 a Dam zud er ger eur c'helou mad.

iannik kokard ma bolonte
 ma doc'h kontant me iel ive.

Da c'houlen ar c'hrass digant Doue
 ma kouskimp on daou en eur goëlead

Ma kouskimp on daou en eur goëlead
 A drebi boëd dorc'h ar skudellad

Dallek Montroulez betek plouvorn
e voaïnt o daou dorn oc'h dorn
kent a v(o)aïnt arruet en Plouvorn.

— Iannik Kokard kortozit en tam
ma zin en ti da kaout va mam

Da c'houd ag hi a deuz pea dra
Da reï da zaou zen da leïna

— va zad va mam petra leveret
iannik kokard a meus goëlet

Pa viot gantan e leïnan
interojit anezan

a doc'h ar c'homjo a deuio d'oc'h e ben
C'houi a roi dezan e kroas nouen.

*[inachevée, car je ne crois pas
que les 3 couplets du fol. 200
appartiennent à cette gwerz.]*

Il n'y a pas de titre dans le ms. Penguern. Variante de Mari Tilly (v. f. 195-196) et de la suivante (f. 201-203).